

# CHANSON NEVEZ

Var sujet an eberezet

Breman na h6n dizourci, ha caout enn tam amzer,  
Eman ecluet an eost ha laquet er sollier,  
Eman deut barz ma speret da gompasi eur son,  
War sujet ar graguez ha demeus ar c'hanton.

E var sujet ar graguez hac ar merc'hel yaouane  
Pere a zo accoutumet da eva gwin-ardant,  
Da ewa cafe ha gwin-gweo, tassadou gwin-ru,  
Odivi, cognac ha liqueur hac ive cafe du.

Mes eus wreg accoutumet da eva odivi,  
Obliget e vo e goas, da zival deuz outi,  
Da divoal outi ale'houez ar prez pehini man an arc'hant,  
Evit empich anezi da gaout pa n'o choant.

Mez eur wreg c'ha deuz adrez hac a rayou troyon,  
Ha ray eun tol lagad da goaz, ha netra na youdon,  
En peb mare deuz ar zua he figouez ar miliner,  
Dre eun devez mad he zoc'h deut ne man quet Yan er guez.

Neuze e pignon barz er gamp, da gargat eur sabat,  
Mar plich gance'h miliner en cass din d'ar marbat,  
Mez mo avertis miliner ha rag ma hefet deuz ma zi,  
Da non pas laret guir ha laret ha ewo odivi.

Breman e vo cavet an tu da gaout eun tam arc'hant,  
Ha pa vo cavet ar gomer e vezo gwin-ardant,  
De bonjour deoc'h ma hommer pel zo meus quet o quelet,  
Demp da glask pep a vapac'h da dori hon zec'hel.

En eur gontan ho doare ezont d'an hostiliri :  
Petra momp ma hommer, coulz he dimp caout odivi,  
Hema digasso gouez dimp ha nerz eun honizilli,  
Me na gavan quet gwel boesson evit an odivi.

Mez dre forc d'an ewan e tenont da vewi  
He comma7cont pilat ho bec ha na zounet hardi,  
Neuze teui stang-ha-stang an demi-quart en dro,  
Digass eta hostis, ne ket arc'hant ha vanquo.

Deuz quement den ewo en ty ho devont consequant,  
Mez confusion en devo ann dud eus ho fresang,  
Mes laret e reont en trezo, da euz quet ho er,  
A setu ase merc'hel, ha so leun ho soufer.

Mes pa vent eru leun a voac'h he tenont war ar ru,  
Mes ne valeent quet neu, branta a reont d'ha d'ha d'ha,  
Unan a lar quenavo poent he d'ha d'ha d'ha d'ha,  
Mes he benn-hal ha lavar me meus ma foar d'oper.

Me ha meus c'hoas da gaout soun, roussin hac houlen,  
Hac ar butun zo manguet barz ma zabatieren,  
Autrenn evelse barz eun ty da glasq zaon ha roussin,  
Fouillan a ra he godel mez arc'hant neuz quet quin.

Mez eur yaouez hardi, pehini deus get bridirit,  
Ha pa ve achu he arc'hant he c'houlen heu credit,  
Mez pa ve achu he arc'hant he c'houlen heu credit,  
Mez pa ve achu he arc'hant he c'houlen heu credit.



0  
657  
1/2

Mes merc'het ar warc'hadourez dibot ne wen ambas,  
Hac a respontas ractal dezi ebars ne faç :

C'houi heuz foetet ho arc'hant barz an hostiliri,  
Ha breman, ha peus aa er da-houlen treou enn credi :  
Dont era er mæs deus an ty, gant eun er coleret,  
Ann ini na ne quet hardi e vo ganti spontet.

Ober e rei tro ar foar, hep mez, evel-ze,  
Couscoude he renq'caout harp barz ma illo bale,  
A nep confusion he bet a rai tro an dachen,  
Mez en dezo hi zud o welet eur sor strouillen.

Ebarz ma vez lin dan de, na guemer na pen na troad,  
Rac ha heu hi has d'ar guer, vo ret caout eur marc'h mad :  
Ha pa fell dezi parlant eua deut a bill bras,  
Passet ar gullec hac ar latin, na war quet d'avantach

Brud e vo hoas deus ar merc'hed hac e ha d'ann evac'h douç  
Ha ew woalc'h betec mont mew, mez ne reont quet a drouz,  
Ar reze la vianna zo agreaploc'h da welet,  
Rei a reant da gredi a welen saurezet.

Ar merc'het yaouanc memez tra, ebarz eun hostiliri,  
Gwerennou gaete bars no dorn ha leun a odiyi,  
Me a meus annaoudagez war buez ar merc'hed,  
Kar bet hon bet, ewechou gaete ho lipet.

Monet a ran da zisclerian ebarz en abrege,  
Darn deus ar marvailhou ze c'hoarvee en Guene,  
Me am boa choaset da vestrez eur plac'h capabl' meurbed,  
A ouar poquet da lost an tas, pa ve ganti carzet.

Eun devez ebars ar foar me hem boa hi rencontret,  
He bars an hostiliri me am boa hi saludet,  
Salud, bonjour plac'h yaouanq tensor ma amitie,  
Contantamant ma speret, objet ma harantez .

Ha dec'h ive den yaouanc, me ho salud ive,  
Deut da guemer, ho lod ar fear, ma he ho polante,  
Quemerit eur banac'h liqueur, pe eur banac'h logonille  
Quemerit deus ar sort eo ar guelan d'ho cout.

A hoë eur pennat amzer hanaveent he sentiment,  
Me laras dezi, ar guin-ardaot zo eun dra excellent,  
Ar banac'h quenta ha ewas ha rez diontan min fall,  
Mez hoant he devoa a dare da gaout eun all.

Ha me ho houlen ive peh a vanac'h d'am zro,  
Me na ma quet risq'caout car ma mestrez ha baëo,  
Ma mestrezic ha blich d'hin, ha dreist an oll verc'het,  
Biquen enn he hompagnunez me nam bezo sec'het.

Evet a sort a garfoc'h emezi ma servicher,  
Me fenos e renquo em c'hondui d'ar guer :  
Allas neuze he teuis da zonzal en memor, em speret,  
Ha cetu aman eun den hac a zo goal dapet.

Nonobstant da guement-ze partial a vo ret,  
Mez ma na ne quet wil querzet, hi douguen ne rin quet,  
Mes pa voamp deut barz eun awel, buc avancet barz en heat,  
Pa zispegan dionti he coeze war ann dachen.

Ar paraplui a zo collet, hac hi zavancher zo a scleg,  
 Hac he houeñ ha zo chomet a damo hed ann dreiz,  
 Cetu clanw bras ar plac'h paour, na guemer na troad, na penn  
 Ha me zo nec'het bras gant ma mestrez strouilleonn.

Ya clanw bras eo ma mestrez, ne quet ewit querset,  
 Ret he din hi lezal war ar n'heñt, ha bi laquat da gousquet,  
 Neuse me zeñ d'ar guer hac hi lezas enno,  
 Pa hi devo cousquet awalc'h, marteze hi difano.


Guelloc'h we d'ar sort merc'het en plac ho farapluiou,  
 Caout kiri goloet pa hefent d'ar foariou,  
 Ha neuze d'ha vianna, ma ne venget wit querset.

He vefent tolet he bars, hac ha vefent chareel.  
 Ho hass he vefet propoc'h car ne velen ket goelet,  
 Ha quit he vefe ho dillat da vezau habimet,  
 Ha comotoc'h eo ive d'ar re-ve deus d' ren,  
 Car pignat ebars ar har a'euz ket quement a boen.

Ho pedi ha ran merc'het dre ma zon d'oc'h mignon;  
 Da vezau moderet pa ewel boessron;  
 Car enn eur ewañ re, a offancer Doue,  
 Distrujan a ret ho corf, ha laban ho ine.

Evidon me d'ho quelen me zo ive bambocher,  
 Demeus ha barez Gourin, hac he chom er Kerguicher,  
 Mea zo eur paour qez den, gant ann dwac'h dibochet,  
 Mez ret ew d'hin lezet ma renq'er bla-man gan ar merc'het.

Hac eur vicher fall ew ive evit destum madou,  
 Ret he dint mont er bla-man da varc'hadour coëffou,  
 Entre ar pez a vo uzet hac ar pez a vo roguet,  
 Marteze he teñ ha beñ, da honnit ma zam boet.



## MARI BEG A ROG A FRI PARTOUT

Var ton ; Son an dançou.

Mar od'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveont eur vreg rog,  
 Me o kunduo oa guerfet, dirag Mari beg a rog,  
 Bemde var dro eun heur, anter e cluc'h var tregon e dor,  
 Kerkent teodou pig ar c'hartier gant enr skaoun pe enr gador.  
 A zired oll en e c'hever, an audianç so digor.

Var barlen Mari o veler pes foyltren assied,  
Var bai e cont pep kommer kement e deus iventet ;  
Klévet a réz pep den lipous a ya benide d'ar c'hafe,  
Pet plac'h a deus tri amoureux, ha pet a zo stad eune ;  
Pet ozac'h a zo mævier, ha pet a bill o grague.

Mari beg arog a gommand var ar c'honseil divragou,  
Eb kaout an nebeula damant e tigor franç e guenou,  
Ma ne deus var e bizach na moustachou na baour.  
E red déi kaout an avantaj da zikriol tu d ar vro.  
Guévier, soton, kos langach, flud a bep kalite zo.

Mari beg arog eo titret vel an huella noblañç.  
Dommaj é n'en d'é ket pried d'eua den pinvidik a Franç ;  
I é princes an diegi, comtes a liboudennou,  
I é dukes al loustoni, marquises ar strakellou,  
Gouarneres ar jolori, baronez ar pillou.

Kerken a ma ve imbandet daou den yaouank da zimi,  
Eve, d'al lun vintin, galvet e c'honseil bras gant Mari,  
Ped Konseiller en gueledeñ a boanga gant e vouton bér  
Evit klask ar guellan moyen da derri pront an affer ;  
Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goas a ve mævier.

Ar re voassa da zikriol an tud a ya en fortun  
A zo, evi an ordinar, merc'hed chommet eb nikou,  
Merc'hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas,  
Haç a gommanç bréma facha, dre ma ne deu den do choas,  
Kouskoude an ini-gossa n'é ket tri-rguent vloa c'hoas.

Kerkent ha ma vel eue eured o tout var zu an Ilis  
Mari beg arog a zireñ en manchoulous en invis,  
Evel eur vloc'h ha vreskin é c'haloup abiou ar ru,  
Holá ! Catel, Jeannet, Perrin, Soas, Mac'harid, deut diou-tu.  
Ceta aman eured Martin, deut dremen ar révu,

Va c'hommer sellit eus hounes, dislivet e davancher  
E c'horneten zo eb ampes, hag e gueledeñ re vér ;  
Ho ! sellit-ta eus an den-man, peguen striz é e vrægou,  
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re lit e voutou,  
Eur chimizeten so gantan var eur rochet en pillou ;

Pa ve eur vreg kes guilloudet, divar e buguel kenta,  
E c'houlen Mari estonet ; petra, nao mis so dija ?  
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pól,  
Ha nask n'é ket c'hoas erruet, ahon ! gréd o deus an tol,  
Eb n'o deveus va c'hemennet, an dra ze gavan drol.

Pa gleo kloc'h Ilis ar barrons o c'hervel d'eur vadiant  
Mari gant eun troad eb botes, a erro arog ar chant ;  
Mas, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur vouesken raoulet  
Da zikour kan Te Drum, evit an néve ganet,  
Gant e c'hommerezet e chom e kichen dor ar véret.

*En ty intañvez ar Goffic, en Lanhuon*